



L. I. C. & M. I.

MERVEL GANT JESUS!

PEDEN SOUDARDED BREIZ

Oh! deuz var va c'halon, Te va lod e'r bed-ma
 Ha testeni dispar euz eur gwir garantez,
 Kroaz ger, a reseviz, da zeiz va Fask kenta,
 Evit va holl danvez! (bis)

Oh! deuz var va c'halon: n'oud-Te ket va fartaj?
 Bete' deiz ar maro n'oud-Te ket va zenzor?
 N'oud-Te ket euz Jesus, e-streged an imaj,
 An tenera memor? (bis)

'Vit va lod da dachou heb-ken a fell d'hin-me...
 Petra' ra d'hin ar bed hag he holl vraoigou?
 Lenva e-harz da dreid' blij kalz mui da m' ene
 Eged he holl c'houeliou? (bis)

Gan-hen Te' zeui' beb leac'h... Pa zeui' heur va maro,
 Gan-hen Te' jomo c'hwaz, 'vel eur minion fidel;
 Te' gompreno heb-ken ar beden vud' raio
 Va c'halon o vervel! (bis)

Te a velio ouz-pen var va c'horf keaz sklaset,
 Ama pell deuz va zud, pell deuz va mam dener!
 Te a jomo gan-hen, pa vin bet dilezet
 Dindan va zam linser! (bis)

Deuz, deuz var va c'halon, o Kroaz va holl danvez:
 Komz d'hin euz a Zouë, — ha ro d'hin d'He heulia,
 Bete' pred ar maro, ato gant karantez,
 E'r boan hag e'r joa! (bis)